

**Servij Gwask**

Roazhon, Kêr ha Meurgêr

Pgz 02 23 62 22 34



@Rennes\_presse

Merc'her 23 a viz C'hwevrer 2022

## Politikerezh yezh

# Kêr Roazhon labelaet e live 2 ar garta "Ya d'ar brezhoneg", evit hec'h oberoù a-du gant diorren ar brezhoneg

D'ar Merc'her 23 a viz C'hwevrer e oa bet labelet Kêr Roazhon e live 2 ar garta "Ya d'ar brezhoneg" gant Ofis publik ar brezhoneg. Al label-se a zo test eus an oberoù niverus a zo bet lakaet e pleustr gant an Ti-kêr evit kas ar brezhoneg war-raok er vuhez foran, sokial hag ekonomikel.

Tro en deus kemeret Ti-kêr Roazhon eus al labeladur-se evit degas soñj eus e engouestl evit diorren yezhoù Breizh (brezhoneg ha gallaoueg) ha talvoudekaat ar yezhoù komzet er gumun.

*"Dellezek eo ar vrezhonegerien hag ar c'hallaouegerien da gaout ur politikerezh publik youlek evit ma c'hellfent ober ar muiañ ar gwellañ gant o yezh, en anv ar gevatalded. Met evezh bras a lakaomp ivez ouzh ar yezhoù all a vez komzet er gumun gant kalz a Roazhoniz ha Roazhonaded. Al liesyezhegezh a c'hoari ur roll evit gwellaat ar genstaged sokial hag ar bevañ asambles".*

**Montserrat Casacuberta Palmada**, Kuzulier-kêr dileuriet evit ar politikerezhioù-yezh ha yezhoù Breizh.

## Gwiriekaat live 2 ar Garta "Ya d'ar brezhoneg"

E 2007 en doa gouestlet Ti-kêr Roazhon tizhout live 1<sup>añ</sup> ar garta "Ya d'ar brezhoneg" gant Ofis publik ar brezhoneg, evit lakaat war wel e obererezh evit kas ar brezhoneg war-raok er gumun. Evit se ez eus bet kaset oberoù pleustrek da benn gant an Ti-kêr evit ma vefe graet gant ar brezhoneg en e vont en-dro pemdeziek hag evit ma c'hellfe an annezidi deskiñ, implijout ha treuzkas ar yezh. Abaoe 2014 emañ Ti-kêr Roazhon o labourat evit kaout al labeladur live 2, dre lakaat e pleustr diarbennoù nevez dibabet e-touez 40 ober kinniget gant Ofis publik ar brezhoneg (darn dre ret, lod all hervez c'hoant ensavioù an Ti-kêr).

Al live testeniekadur 2, bet tizhet hiziv gant Ti-kêr Roazhon, a glot gant sevenidigezh 10 ober da nebeutañ diwar an 40 a zo kinniget.

E-touez an tri ahel kinniget gant Ofis publik ar brezhoneg, setu an 13 ober a zo bet lakaet e pleustr gant an Ti-kêr :

- Ahel niv. 1 - diskwel ar brezhoneg
  - Lakaat pannelloù divyezhek evit mont e-barzh ha mont e-maez ar gumun ;
  - Staliañ plakennoù-straed divyezhek pa vez renevezet ar plakennoù pe pa vez savet hentoù nevez ;
  - Lakaat ur panellerezh divyezhek e plas e meur a savadur e dalc'h an Ti-kêr ;
  - Lakaat furmskridoù divyezhek e-kerz an holl evit an aktaoù marilh (levrig-familh) ;
  - Sevel pedadennoù divyezhek evit e-leizh a abadennoù aozet gant an Ti-kêr ;
  - Embann ur pennad e brezhoneg e pep niverenn eus ar magazin-kêr ;
  - Sinañ ur gevrat kefridi gant Ofis publik ar brezhoneg evit lakaat an oberoù e pleustr war hir amzer ha merañ an traoù.
  
- Ahel niv. 2 - skignañ an anaoudegezh eus ar yezh
  - Brudañ an hentad divyezhek er gumun ;
  - Skoazell arc'hant ha/pe teknikel evit sevel ur vagouri e brezhoneg er gumun pe er par etrekumunel ;
  - Skoazell arc'hant ha/pe teknikel evit staliañ pe diorren un hentad divyezhek er gumun ;
  - Kemer perzh er c'houlzad bloaziek evit brudañ ar c'hentelioù brezhoneg d'an dud en oad gour.
  
- Ahel niv. 3 - ober dre gomz gant ar yezh en darempredoù foran
  - Arc'hantaouiñ oberoù stummañ micherel evit reiñ tro d'ar re a garfe e-mesk koskor en ti-kêr deskiñ brezhoneg pe emvarrekaat e brezhoneg ;
  - Kemennerezh divyezhek war responterezh an.

Er bloavezhioù da zont e vo ret gallout kreñvaat an oberoù-se.

## | Ur politikerezh yezh uhel a-du gant yezhoù Breizh

Ti-kêr Roazhon en deus sikouret da lakaat war-sav un hentad kelenn brezhoneg adalek an oad tenerañ (gant e skoazell evit sevel ur vagouri gevredigezhel e brezhoneg, hec'h anv Bisigoù) betek an oad gour (gant e skoazell d'ar greizenn stummañ Skol an Emsav), hep disoñjal e skoazell d'ar c'hlasoù divyezhek. Hiziv an deiz ez eus e Roazhon tost da 900 bugel skoliataet er c'helenn divyezhek galleg-brezhoneg e 9 skol kentañ-derez (5 er publik, 2 skol Diwan, 2 er prevez) hag e 3 skol eil derez (2 er publik hag unan er prevez). E-touez an 900 skoliad-se, 426 a zo enskrivet en unan eus an 21 a glasoù divyezhek galleg-brezhoneg a zo en deskadurezh publik.

Evit brudañ an divyezhegezh e labour an Ti-kêr e darempred strizh gant kevredigezhioù breizhek ar gumun ha dreist-holl gant ar gevredigezh kerent Div

---

Yezh Roazhon hag a gas ar c'helenn divyezhek brezhoneg-galleg war-raok abaoe ouzhpenn 40 vloaz er skolioù publik. Kemer perzh a ra an Ti-kêr ivez er c'houlzad brudañ "Quand je serai grande, je serai bilingue", kaset en-dro gant Ofis publik ar brezhoneg hag ar gevredigezh Mignoned ar Brezhoneg ha harpet gant Rannvro Breizh, evit reiñ da anavezout ar c'hlasoù divyezhek.

Ouzhpenn-se e tegas Ti-kêr Roazhon ur skoazell arc'hant d'ar c'hevredigezhioù a vrud ar brezhoneg hag ar gallaoueg :

- Diwan Bro Roazhon (brezhoneg) ;
- Skol an Emsav (brezhoneg) ;
- Skeudenn Bro Roazhon (brezhoneg) ;
- Kelc'h Keltiek Roazhon (brezhoneg ha gallaoueg) ;
- Chubri (gallaoueg) ;
- Bertègn Galèzz (gallaoueg) ;
- Institut du galo (gallaoueg) ;
- La Bouèze ;
- Dastum.

## Pleustrek

---

- [Karta Ya d'ar brezhoneg](#)